

Martin Pierre : Mouez Kerne.

(bet ganet e Gwiskri e 1868- marvet e Gourin e 1935. Beleg e oa).

Bet embannet e 1929.

Pep skrid a zo heuliet gand eun droidigez e galleg. N'eo ket bet lakaet amañ.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Brezoneg Gwiskri a zo etre hini Bro-Gerne hag hini Bro-Wened. Implijet e veze gand Martin, med a-wechou gand stummou lennegel (da lavared eo a Vro-Leon).

Aliez a-walh ez eo galleg ereadurez Martin.

BIT, MA YAR, BIT !

Cheinig ! va zud paour, a lavare Jakez, da grevi va bouzellou em-eus c'hoarzet ar zizun all gand Chann Beg-an-Dro. Oll eh anavezit Chann Beg-an-Dro, rag hi 'zo mamm-baeron da Luizig Pikous ha fillorez d'Alen, ar Hleun-Braz. Ne vern pegen berruz e skoe Chann war he bern dillad amliouaj, trehi a ree he mouez war hini he baz-kannerez.

Diwar-bouez ar yer 'oa pintet¹ Chann ar wechad-mañ. E-giz ma ouiit, Chann 'zo ken mignon pe mignonnoh d'he yarig zu evid d'he *hini-koz*, hag aliesoh e lavar : « *Bit, ma yer, bit !* » evid na lavar : « *Santa Maria, mater Dei.* » Hogen – evid prezeg e-giz Paotr Karaz – hervez eul lezenn diwanet warlene euz paperiou koz ar Prefed, ar yer a zo difennet oute lakaad o fao war ruiou ar Hêriou ; ha Gourin, evel ma lavare gwechall Matilin an Neiz-yar, a zo *Kêr*, kenkoulz ha Pariz, pell 'raog ma oa kroget c'hoant din-me e-barz tad-kaer mamm-guñv tad-koz Alen ar Hleun-Braz. Tabouliner-kêr en-deus degaset soñj dim euz kement-se daou pe dri miz 'zo.

Ya, eme Chann, n'ouzon ket pikol galleg, rag n'on ket bet 'med teir zizun e-barz ar skol, med eun dra bennag e-giz-mañ en-deus embannet : « Avis ! Les poules qui seront été vues à discraper les bernigou teil hed-a-hed d'ar ruiou, attraperont un prosez verbal avec le garde-champette et qu'ils seront obligés de payer, né quand même qu'ils seront été écrasés par les aotroumobiles et les rampipettes. »

Ma hini-koz a oar galleg braz, rag tri miz eo bet o labourad e kostez Pariz. P'en-doa klevet ahanon o tribun reñkad an tabouliner, eñ a lavare din : « Afe, Chann baour, kaer em-eus êsaad ho lakaad da brezeg mod-kêr, n'oh ket evid dond a-benn da lavared eun dra evel ema. Ne ve ket lavaret eur rampipett, tamm tra zod, med eur vilimbipett. » - Rampipett, vilimbipette, emezon, ne ran ket forz ! Oll ar c'hoariellou-ze a dlefe boud stlapet dreist ar harz 'raog mired ouz va yarig zu da vond da glask he zammig boued ! Gwelloh e vefe d'ar gardchampett ha da Veg-e-dog² lakaad o hrab war an tammou pianoou mekanik a zo dre-ze o lakaad ar chas da harzal, ar zaout da vreskenn hag ar yer yaouank, kizier ha polezi, da bellaad diouz o glud !

Da hortoz, merhed paour, n'eo ket chifet on, gand va yarig zu ; kalz muioh, a lavare ma hini-koz, evid pa vo e~c lakaet da "Rohellou-skeul³". Noz-deiz ema va zoñj enni. Hi he-unan, rag hounnez a zo eul loenig sklintin⁴, ne gred ket ket ken tapoud hed he gar evid mond da

¹ pintet fuloret (hervez an oberour).

² Veg-e-dog : ar jañdarm.

³ Rohellou-skeul : ano bered Gourin (hervez an oberour).

⁴ sklintin : speredeg (hervez an oberour).

ziskrapad an disterra bontadig kraz⁵. Dihouzougal a ra war an treuzou pa glev eun tammig trouz, ha koll a ra mik he fenn pa spurmant eun “aotroumobil“ pe eur “vilimbipett“ bennag ; rag n’eo ket gand eun uig bemdez, ne vern pegen ker eo an uiou hag an amann, e paehe he frosez. Neuze, kaer em-eus lavared ar braoika ma hellan : « Bit, ma yar bit ! » », mond a ra diouz an eil baz-skeul d’eben en eur hopal : « Jobjob... Job... Jobjob... Job...

N’ouzon ket pesort Job e hop va yarig zi... war-lerh Job ar Hog, pe daol chañs⁶ !

⁵ bontadig kraz : kaoh-kezeg kraz (hervez an oberour).

⁶ pe daol chañs : emichañs.